



573


# CHRISTENIEN DA VIKEN


DISKAN. — D'hor Mam San - tes An-




na, D'ann In - tron Va - ri - a, D'hor Zalver ben-ni




get Ni 'vo fi - del be - pret!



1. Hor c'ha-lon ba-our man- tret Gant



gla- c'har hag en - krez, Ni a zo da - ou - li-



net, Di - ra - zo - c'hui Guer - c'hez!

- 2. Kurun hag avel foll  
Varnomp so dirollet,  
Hor bro 'zo vont da goll,  
Truez! mam benniget.
- 3. Lezen Doue guechall,  
'Rene ker kaer ar vro,  
Hirio lezen tud fall  
He stlej eün d'ar maro.
- 4. 'Vel eur vanden chas mud,  
Gant kounnar, noz ha deiz,  
Emaint etouez ann dud  
O klask mouga ar Feiz.

- 5. Ni 'zo guir gristenien,  
Krouadurien Doue,  
Savet en he lezen  
En he zoujans ive.
- 6. Ni a zo christenien,  
Prenet gant goad Jesus,  
Maget dre 'c'hourc'hemenn,  
Gant he gorf presius.
- 7. Christenien, hor baniel,  
A zo kroaz hor Zalver,  
Ni er zao soun 'n huel;  
Bemdez, e peb amzer.

8. Eur vrezel griz meurbet,  
'Zo great d'hor bugale,  
A n'ho dilezit ket,  
C'hui zo ho mam ive.

9. Ar falla kentelliou,  
'Zo roet dezho bepret,  
Koll a raint ho eneou,  
E skol ann Drouk-Speret.

10. Sempl, dinerz, ker bihan,  
Ma na vent diouallet,  
Gant nebeut a boan  
Abred 'vesfent trec'het.

11. Petra dalv guisiegez,  
Mar gollomp hon ene,  
Ar skiant, ar furnez,  
A zo oll he Doue.

12. Guechall hon tadou koz  
Brudet 'vit ho furnez,  
A glaske 'r Baradoz  
Araok ar guisiegez.

13. Skianchou 'zo netra,  
Pa'z eont enep Doue,  
Ni 'fell deomp dreist pep tra  
Savetei hon ene.

14. Guerc'hez, hor mam santel,  
Roit sikour heb dale,  
E plegou ho mantel  
Kuzit hor bugale.

15. C'hui a zo galloudus  
Var galon hor Zalver,  
Bezit madelezus  
C'hui 'zo eur vam dener.

16. E pevar c'horn ar vro,  
Neuze, ni oll, Guerc'hez,  
Beteg heur hor maro,  
Ni a gano bemdez!

*J. Lalain*

Imprimatur : Du MARHALLAC'H,  
Vic.-Gén.

Quimper, le 8 septembre 1882.